

378, suite)

## Recit

Eus an darvoudou horruhl c'hoarvezet en Paris,  
ar 23, 24 ha 25 demeus a vis Even 1848.

Var ton Gueñz Santez Eodet.

Christenien, mad a Vreiz, guir vugale Jesus,  
Deut, m'ho ped, da zelaou eur recit truezus  
Eus maleurion horruhl c'hoarvezet en Paris:  
Frailla ra ar galon ouz arrestou qer cris.

O maleurus Paris! piou a elle sonjal  
E vijet bet laqet en qer bras caon ractal?  
Allas! an decrejou demeus an Eternel  
Zo bet atao euzet démp-ni, oll, tud marvel.

(379) Ar mintin, da zeg heur, tri-varnuquent Even,  
Voe formet bardellou (1), eur spourion voa compren,  
D'amprech ar zoudardet da ellout darempret,  
Evit qerrzat diouc'h-tu var an dud revoltet.

Ar revolt zo seignet dre oll eus a hep tu;  
Ne vouiet pelec'h mont: bardellet voa pep ru.  
Oll trouplou a Baris, ar gard national  
Zo dindan an armou en em garet ractal.

Eur gombat ar goassa zo neuze commancet:  
En em ganna a rêt evel tud coumaret.  
Eur spourion voa clê:et trouz an tabourinou,  
Hac an tocsin euzus eus an oll ilidou.

An tennou fusuill voa evel ar grizill stanc,  
Ar c'hanonion ive a denne hep nep manc.  
Evit difen Ty-Kêr voa daou-uguent canon,

(1).-Eur dou tuz eus a guiri, a gariolenou, a gortach, a veiz hac a draou all, borniet huel en  
fennou ar ruyou gant tud revoltet, evit en em goarantissa hac amprech ar zoudardet d'o ataqi ha  
da zarempredi dre ruyou all.

314

Rac aoun demeus euy tol benac a drakison .

Impossubl eo kompren pens e voa Paris  
Epad an horroliou qer cruel ha qer cris :  
An dud fall bardellet a denne hep danger  
Var venjerien an urz, qvir diffennerien Kêr.

Deus peurs ar revoltet ne zeziret qen tra  
Nemet pillach, viol, tana, distruj, larza :  
Mes ar Francisien vad, hep nep dale benac,  
A red dindan urzou ar general Cavaignac.

(380)

« Citoyanet honest, eme ar General,  
» Saillomp oll gant couraj var an dud infernal  
» Pere ne fell deze nemet muntr ha pillach,  
» Geffiou eus an ifern, carquet oll a arrach .

» Lacomf hor c'honfiang er C'hrouer souveren,  
» E vadelez a rai demp beza trec'hourien ;  
» Soutenomp an enor evel tud a galon,  
» Ha combatomp erit ar qvir Religion....»

Prim evel an avel, gant ardor e qerzjont  
Var an dud revoltet... Mes eno p'ezujont,  
Ar vaillant General a zell an dud barbar,  
Ha mantret e galon, dezge ferm e lavar :

« Tud egaret ! ha c'houi a gred bea certen  
» E combattit amañ vit an ouvrierien ?...  
» Nan ! nan ! tromplet oc'h calz : int eo a gombattit ;  
» Varne eo e coezg an oll goad a scuillit .

» Eñ hano ar vam-brô, a laqit oll en goad ;  
» Eñ hano hor Zalver, va zelaouit ervad :  
» Deut... en em dolit prest en dirrec'h ho preudeur,  
» Ha laqit buan fin de quement a valeur .»

(381)

Mes allas ! va Doue ! comzou qer jenerus  
Ne rejont mann ebet var an dud maleirius .  
Arc'hant o devoa bet vit en em revolti :  
Ar c'krim eo a gommand calon an dud impi .

Ja, an diaoul a rën en fonz o c'halonou.  
 Selasuit ar c'hrimou a goumet ar monstrou:  
 Munternia reont darn, trec'hi treid ha daouarn,  
 Dic'houzouga darn all!... O calonou houarn!

Ne voa get avoalc'h c'hoas d'o zorfjeou cruel:  
 Corfou maro o deus plantet var o bardel,  
 Da zerrich da c'hiton, hac o deus alumet  
 'Goulou da sclêrijen' eur c'hen horrupl torfet!

Oll malig Lucifer a voa en o speret:  
 Tud gemeret gantê, en bes zo esgennet.  
 A-voe Rom idolatr (1) ha Cortez (2) en Indes,  
 Ne glêvjot comz demeus seurt horroliou james.

(382) Demeus ar prênestou e tennet bars er ru;  
 An dud a sciët d'ar maro a bep tu.  
 O Grouer souveren, misericordius!  
 Deut da laqat peurfin d'eur brezel qer spontus.

Crena a ra ar goad dre an oll izili,  
 Pa zôjjer e zeus bet calz a c'hraguez qer cri  
 Da goumetti crimou zo dianavezet  
 Etonnez ar barbaret, memes ar zovajet.

An Autrou Arc'hescop santel eus a Baxis,  
 Qerqent ha ma clévas comz eus ar revolt cris,  
 Gant eun hast ar vrasa zo prest en em rentet  
 Da brezqqui ar peoc'h d'an oll dud revoltet.

Daoust d'an danjer vrasa, e fign var eur bardel,  
 Hac e lavar dêze gant eun ton solanel:  
 « O va bugale quèz! dilezjit hoc'h armou,  
 » Ha ne vezit get caus a niver maleuriou.

(1). - Rom, d'an ampoent-se, a voa pagan; hirio eo demeuranq hoq tad santel ar Pab.  
 Eno eo e souffras millierou eus a gristenien fidel d'ar Feiz, ar verzgerenti an horrupla,  
 dindan rën impalaerien barbar.

(2). - Cortez, general Spagnol, goude beza bet recevet mat gant impalaer ar Mexic,  
 en devoe a guellet da zêvi en bes general ar monarc maleürus-se, couz hac e oll  
 officieren, ha darlaqat ar viô en tân hac en goad.

316

» Ha c'houi ve cris avoalc'h da vea muntreien  
 » D'ho prais, d'ho preudeur, eveldoc'h Francisien!  
 » En hano sacr Jesus, m'ho ped a greiz calon:  
 » Laqit fin d'ar brezel, bevit en union.»

Gerqent eun tenn fusuill a sco an den zantel,  
 Hac en asten ractal... blesset horrubl marvel.  
 Transportet voe ractal evit bea pauset;  
 Mes allas! va Doue ne zeus esper abet.

(383)

Ar Prelat maleürus en deveus gouleannet  
 Digant e vikel-vras, an autrou Jacquemet:  
 « Lavarit hardimant, me ho ped, va mignon,  
 » Ha c'houi a gar e zeo va blesseür goal don...»

» — Allas! ô va Doue! blesset oc'h daerjurus:  
 » Sc'et oc'h d'ar maro, va frelat vertuzus!...  
 » — Mâ! eme 'n den zantel, p'eo bolonté Doue,  
 » Contant on da ober sacrificiç va bue.

» Va Doue! gent mervel, me gred ouzoc'h goulenn  
 » Da laqat rên ar peoc'h etouez ar Francisien:  
 » Graç d'an dud egaret... Ra blijs d'êc'h erwad  
 » Ne vo mui, va c'houde, scuillet nep banne goad!...»

Ar zant Pastor merzer a rentas e ene  
 Gant tranqilite mas etre dasuarn Doue.  
 Er pales, tro-vardro, en tyes, er ruyou,  
 Ne glêvet nemet clêm ha nemet hirvoudou.

Deut eta, tud impi, da gontempl ho victim!  
 Sellit an den zantel ar preiz demeus ho crim...  
 Laqit fin d'ar c'harnach dre zônch d'an den zantel,  
 Zo en em rezolvret evidoc'h da vervel.

(384)

Niver Generalet zo blesset, pe laqet;  
 Mes o henvel rafe hor glac'hari meurbet;  
 Mes assuri eller, deiz eürus Waterloo  
 Ne scôas get qement a cheffou d'ar maro.

Deputet ar Franç a chommas deiz ha nôs

Atao en assemble, hep gemeret repos.  
 Meur a hini a red var lec' hion ar c'harnach,  
 Hac en em sacrifi gant ar brassa courach.

An trouplou unanet d'ar gard national,  
 A gombatte vaillant evit an urz leal.  
 Enor ra vo d'ê oll, rac be' o deus trec'het  
 Fulor abominabl ar monstrou revoltet.

Scrifet e voe neuze dre Franç da gass ractal  
 Detamantchou deus ar gardou national,  
 Evit mont da zicour o breudeur da Paris,  
 Voa nôs-de a zerrich hac a voa meurbet seuis.

(385) Ze n'eo get estonus : gant an trouplou e voant  
 Pêvar devez, nôz-deiz, o combat vaillamant ;  
 A drugare Doue o deus bet an enor  
 Var an dud revoltet da c'honit ar victor .

Oh! ma o devije an dud maleürus-se  
 Bet qement a gourach en eun amzer a voe,  
 P'antreas en Paris hor güir enemist,  
 Birriqen sur ~~hor~~<sup>d'o</sup> brô ne vijent distroet .

Neuze o dije bet certen eur güir enor ;  
 Mes o c'hourach hirio d'an oll a ra horror :  
 Difen ar vam - bro zo eun dever lejitim,  
 Mes combatti breudeur a zo atao eur c'hrim .

A bêvar c'horn ar Franç voar redet d'an armou  
 Evit difen an urz coulz hac al lezennou :  
 Lalz tiud vaillant demeus ar gard national  
 A zo en em offret da bartial ractal .

Impossibl e zeo demp dont amâ dor heuvel  
 Qement zo partiet hac a dost hac a bell :  
 Ne gomzimp get nemet eus an detachamant  
 Formet en Montroulez, potriet voesc ha vaillant .

(386) D'al lun, c'hoec'h - varruquent demeus a vis even,  
 Da c'hoec'h heur eus an nôs, e voa var ar blacen

Potret vad Montroulez o tepord mignonet,  
Pere, gant euy kast vras, 'zo souden êruet.

Gant joa vras e veljot tud vaillant Landerne,  
Landivisiau, Castel, Lannion, Treguer ive,  
Ouz en em unani en un detachamant,  
Hac evel güir Breizis, leuz a gourach ardant.

Biscoas gement a dud en q'er ne voe güelet;  
Ar blaven, an daou quê pen-da-ben voa carguet;  
Prêneston quê Leon a voa illuminet,  
Evit rente enor d'ar voillant Bretonet.

Ar gard national coubz hac ar garnison  
A voa en em rentet vel mignonet güirion,  
Da ober ar c'hundu betec ar vatimant  
Ma zê da embarqi prest an detachamant.

Ar roullamant a rêr d'an tol eus a zeg heur,  
Hac en em lag en march gant joa vras hor breudeur.  
Ar music a c'hoari êriou national,  
Ha calz tud a game gant joa dreist-ordinal.

Epad ma embarqet er batimant vapour,  
Hac epad an appel bete tost d'un nec heur,  
Hep nep paoues a grenn e c'hoarie 'r music,  
Hac e crie an oll: Vive la Republiq!

(387)

Qerqent e tiamar ar vatimant newze,  
Hac an oll a c'houlen benediction Doue  
Vit qerent, mignonet, carguet eus a vaillans,  
A güitta oll evit difen an urz er Franç.

Daou devez goude-ze voant rentet en Paris,  
Hac o deus montet gard, daoust ma voant meurbet scuis.  
An oll a admire o dalc'h mad hac o reiz:  
« Güir eo, a lavarent, eo vaillant potret Breiz. »

Eun deiz voa a zervich tout an detachamant,  
Hac ec'h êru souden, tost euy enteramant:  
Hor Breizis, <sup>var gur glin</sup> ~~ar~~ a brezant an armou,

P'lo d'oa Parisianet var o fenn o zocou .

Grosmoli a rē oll soudarded mad hor brō,  
Hac int crial gant neyz : « Respet d'ar re varo !... »  
Drouc'h-tu neuze 'veljot an oll dizolset,  
En eur lavarat voa potret Breiz tud calet .

(388) Distroet eo d'o brō tud an detachamant,  
Goude bea peurgrêt dever a dud vaillant .  
Trugare, va Doue, ma int oll distroet  
Etoez o mignonet, o c'herent, en yec'het .

Tri deiz ha teir nosvez eo padet ar c'harnach :  
Ne velet t'ro vandro nemet pep seurt ravach .  
Nac a dud zo maro ! nac a re all blesset !  
O Salver adorabl ! n'o abandonit get .

En oll ilisou Franç e zeus bet celebret  
Servichou solanel evit an dud lazet .  
Graç d'ê oll da vea recevet gant Doue,  
Goude o oll boanniou er joayou eus an êe .

O va c'hennois qer ! quier gristenien a Vreiz ;  
C'houi pere voe atao ferm ebars er quier Feiz,  
Pedomp Doue da rēi demp ar ferm esperanç  
Da velet rēn ar peoc'h, an union en Franç .

Lavaromp oll breman ive gant an Ihs  
Eur Batez, eun Iwe, hac eun De profundis  
Evit an oll dud paour pere zo bet lazet :  
Ra vint er barados gant Doue recevet !

(389) Pedomp Doue ive vit an intanvezet  
Zo er brassa glac'har chomet gant minoret :  
Ra deuyo hor C'hrouer d'o froteji bennde,  
Da zepord mont de gant d'ar barados eun de .

Tad a vizericord ! sellit an dienez  
A ra en em zantout en qer ha var ar mēz :  
Teur ezit, va Doue, laqat fin d'hor glac'har,  
O laqat prosperi oll madou an douar .

320

Doue a vadelez, selaouit hor peden :  
Grit rën ar peoc'h en Franç etouez ar gristenien ;  
Pellait diouzomp pep seurt disunion,  
Ha grit triumph dre oll ar quier Religion !

Lédan .

(Vol. VII, p. 378-389.)  
strophes non numérotées.